

Dornskridoù Milin : Kanaouennouù

72. FOLGOET

Ar bevare sul a vis meurs pehini zo présent
 Euz a vlavez ar bizéost mil eiz bloaz ha seiz cant,
 Eo c'hoarvezet ar malleur en ilis ar Folgouët
 Assur criz ve ar galon na deufe da dristat.

Petra a droubl va repos? peseurt squeut a velan
 Deuet é creiz an anter noz...! Peseurt cri a glevan ?
 Jésus en^otan estlamus a velan anflamet : ° Komp.:un
 Me ya, en hano Doué, féteiz sur da velet.

Fonta ra va daoulagat, ho muriou beniguet !
 Euz o guelet dizolo, gant an tan ruinet
 Devet oc'h, oll dorojou, ho guer a zo strinquet
 Ar ploum, ar vein, an ernach var o tro zo poazet.

Pénoz é pad va c'halon da antren en ho ti
 Pa ne vélan oc'h imach, allas ! Guerc'hez vari !
 Nag hini ho nab Jesus, nag ho mam béniget
 Na figur, na tabernac'h, na taolen all ebet.

O eston ! O tra estranch ! O caz epouvantable
 O° traou sakr, Nab quer Doué, hor zalver adorabl °Komp:
 Me lavar an oteriou a vélan oll fraillet ho
 Aman é souffr va éné hag é trouble va spered

O estlamou furius ! O flammou didruez
 C'houi poa guechall respetet, balamour da zoué
 Tri grouduric santel e fournez Babylon,
 Pelec'h éma ar respect a dléfac'h d'hon introoun

Mar plisi ganec'h accordi, Rouanez an envou,
 Eur c'hrac c'hoas d'o servicher m'er gouleñn gant dae
 Perac en deuz permettet Doué oll buissant, -lou
 Na c'houi guerc'hez ar Folgoët eur berz kén désolant.

Va mat ka va servicher va c'hliant va c'hredit
 d'an cil é vé inutil é ouffé den ébet
 Piou en devez alumet an tan goal em ilis
 Mes brem a mé lavoar dec'h perac e permittis

Doué a lézas guéchall ar princ Nabuzardan
 Da billa ha da laquat e ludu hag e tan

- 206 -

Ar guer a Jerusalem ha templ sacr Salomon
ha Nabuchodonozor da zistruch ar guer à Vabilon

Eur vech all e permettas d'ar princ Anthiocus
Eun all da Vespasien dre zorn é vap Titus
Dézoli an temple sacr-zé balamour d'ar pehet
A réné ennan ha var é dro, ha partout dre ar bet.

Eun den a zo badézet a zo préciussoc'h
Ornet a bep seurt graçou hac eur pris huelloc'h
Coustet querroc'h da Zoué ha mar deu da bec'hi
Piessa tra zo er bet e dont d'é repari

Ar fénix ar yaouanqua pa vez scuiz gant cozni
En em exposz da vervel evit en em dévi
Neuze deneuz é ludu en em form a névé
hag en ilis ar Folgoët e bet c'hoarvezet-sé

VVVVVVVVVVVVVVVVVVVVVVVVVV